

(f° 190)

Ar Kloarek dimeet d'he vestrez.

Kenta ma velis ma mestrezik e voa er sall o danssall  
en e dreid eur boutou lijer gant eur bazou inkarnall.

Debonjour dec'h greg ancien debonjour dec'h a laran  
Konjes d'ho merc'h da zimizi digan ec'h a goulenan.

Mag el leal, Kloarek iaouank kid da goulen gant he zad  
Gant he zad kit ta da c'houlen zo er jardrin ho pallad.

Debonjour desc'h ozach ancien debonjour desc'h a laran  
Konjes do merc'h da zimizi digan ec'h a c'houlenan.

Va merchik a zo iaouankik er bloa man da veza dimeet  
Mar keret dond da vla d'he c'haouet chouï ne veot ket refuset.

ma na mes ket hanei dar vloa man vid da vla me nem beso ket  
Rag tost eo dija an termen din da vea beleget.

Na dallit tu Kloarek iaouank na dallit ho mouchouer  
tri verad goad a zo heman evid donnet do dilezel.

na dallit tu Kloarek iaouank na dallit ho karante  
evid nem bo ket a vallochau o temeï va bugale.

}

Jannet Puill 14 janv: 1851.